

SANT IANN - BADEZOUR

War don : *Jesu, dulcis memoria...*

Diskan. Sant Iann-Badezour, ni ho ped,
Goulet sklerijen d'hon speret,
Nerz da c'heuil, da garout Jezuz,
Wit bezan eun de evuruz.

1. Eun den e oa bet digaset
Gant Doue 'rog Salver ar bed,
Ewit prepari d'he c'hraso
Eun hent eeun d'or c'halono.
2. He hano oa Iann-Badezour,
D'ar re zo humb eur mellezour ;
Rak-ze nezan Jezuz n'euz gret
Ar meuleudi-man kaer meurbet :
3. En touez oll bugale Adam
Ne so biskoaz kavet eur vamm
Hag a nevez maget he bar ;
Er gwirionez d'eac'h me en lar. »
4. N'e oa ket c'hoaz deut war ar bed,
N'e oa deja santifiet
N'e oa Jezuz p'e-z-eaz ar Werc'hez
Da welet he c'hinitervez.
5. Hen so vel eur werelaouen
Deut arog ar gwir sklerijen,
Da gaout ar re a zo dallet
En tenwalijen ar pec'het.

Griziu c'hoero evit beva.

6. Wit diskwez d'he hent ar furnez,
Diski d'he ar gwir santelez ;
M'e zeui ebarz en ho c'halon
Gant gras Doue peuc'h ha pardon.

7. En eun dezert ec'h-eaz abred
Da guzel pell d'euz trouz ar bed ;
He wiskamant oa eur c'hroc'hen,
He vagadurez karv-raden.

8. Eno kichen reier Jourden,
E prezege ar binijen,
Hag e roe ar Vadeïant.
Er skeud eveuz ar Sakramant.

9. Eno, eun de, de evuruz !
Anavezaz he vest Jezuz
O c'houl digant he servijer
Ar Vadeïant vel eur pec'her.

10. Goude, p'hen gwelas o tremen
E lavaras d'he ziskibien :
Sellet Oan Doue, hon Aotro,
Sammet eveuz hon pec'hejo.

11. N'eur prizon finis he vue,
Dre m'e tifen lezen Doue ;
Eno e oa bet diennet
Dre ali eur wreg *ennet*.

CH. LUC

(Propriété).

Antikore

en honneur d'as Plac'h Suruz Jm Jm

par M. Curé de Landivisiau
 M. Milin, Curé de Landéjellec
 M. Guéguen, de Gouézec
 M.